

Modèle CCYC : ©DNE

Nom de famille (naissance) :


(Suivi s'il y a lieu, du nom d'usage)

Prénom(s) :

N° candidat : **N° d'inscription** :

(Les numéros figurent sur la convocation.)

Né(e) le : / /



1.1

Évaluation

CLASSE : Première

VOIE : Générale Technologique Toutes voies (LV)

ENSEIGNEMENT : Breton

DURÉE DE L'ÉPREUVE : 1h30

Niveaux visés (LV) : LVA **B1-B2** LVB **A2-B1**

Axes de programme : **Axe 2** : « Espace privé et espace public »

CALCULATRICE AUTORISÉE : Oui Non

DICTIONNAIRE AUTORISÉ : Oui Non

Ce sujet contient des parties à rendre par le candidat avec sa copie. De ce fait, il ne peut être dupliqué et doit être imprimé pour chaque candidat afin d'assurer ensuite sa bonne numérisation.

Ce sujet intègre des éléments en couleur. S'il est choisi par l'équipe pédagogique, il est nécessaire que chaque élève dispose d'une impression en couleur.

Ce sujet contient des pièces jointes de type audio ou vidéo qu'il faudra télécharger et jouer le jour de l'épreuve.

Nombre total de pages : 4

Baccalauréat général et technologique
Langues vivantes régionales - Breton

Classe de première

Compréhension de l'écrit et expression écrite
(3^e trimestre)

<u>Niveau visé</u> LVB : A2-B1	<u>Durée de l'épreuve</u> 1 h 30	<u>Barème 20 points</u> CE : 10 points EE : 10 points
---	---	--

L'ensemble du sujet porte sur l'**axe 2** du programme : « **Espace privé et espace public** »

Il s'organise en deux parties :

- 1- Compréhension de l'écrit**
- 2- Expression écrite**

Vous disposez d' une heure trente pour prendre connaissance de l'intégralité du dossier et pour traiter la compréhension de l'écrit (partie 1) et le sujet d'expression écrite (partie 2) en breton .

Diell 1

Gwreg o gwaz

Daoust hag un tamm plas bennak o doa ar merc'hed war ar maez, estreget en o zi, ha neuze evel gwreg o gwaz ?

Naig Rozmor : A-wechoù. An dra-se a zepant diouzh tro-spered an ozhac'h¹. Peurliesañ, ar gwaz 'oa mestr en diavaez, mestr war ar c'hezeg, war e barkeier, war an ostilhoù. Ar wreg a oa mestrez en ti ha war ar vugale. Evit ar pezh a selle ouzh renkañ an ti, prenañ, gwerzhañ, evit sevel ar vugale hervez he soñj. Soursial a rae ouzhpenn ouzh ar saout hag ar moc'h, yer ha lapined pa veze diouto. An den a oa mestr penn-da-benn en e barkeier hag ar vaouez en he zi. Un dra divizet ur wech evit tout e oa.

Met, a-wechoù, marteze, e veze gwazed hag a veze laosk war o labour. Neuze, ar merc'hed a foue o fri un tammig er parkeier memestra. Pe evit sachañ war o gwaz, pe war an dud diouzh an deiz, pe evit evezhiañ anezhañ un tammig. Met, ma oa kalonek ar gwaz war e labour, hag ar vaouez ur vaouez hag a c'houarn², e chome peb hini en e blas.

Pa veze un dra bennak d'ober, lakaomp er parkeier, ar gwaz ne deue ket da c'houlenn digant e wreg : « Daoust ha mat e vije deomp terriñ³ ar Waremm Bellañ ? » Nann. Ar gwaz a lavare d'e wreg : « Me zo e soñj terriñ ar Waremm Bellañ ». Pe : « Me zo

¹ An ozhac'h : ar gwaz.

² ...a c'houarn : ...a ren

³ Terriñ : difraostañ

e soñj cheñch ar marc'h-limon⁴ ». Hag er memes mod e lavare ar wreg : « Me 'rank mont dimeurzh da Gastell da brenañ boteier d'ar vugale ». N'eo ket goulenn aotre ez oa.

Met ma veze neuze ur mizoù⁵ brasoc'h da ober, un dra bennak ker lakaomp, e c'houlenne ar wreg : « Kavout a ra dit e c'hellfemp prenañ ur fourno ? Ezhomm a-walc'h a vije d'hen ober ». Neuze 'veze un tamm kaoz etrezo. Hag ar gwaz marteze, ma 'n deveze c'hoant da brenañ un ostilh bras, lakaomp un dornerez, ne rae ket heb goulenn ali e wreg.

Diwar Mikael Madeg, « Pennad-kaoz gant Naig Rozmor », 1984

Diell 2

Reiñ blaz d'ar vuhez ?

Anavezet hon eus an amzer 'lec'h ma chome ar merc'hed er gêr da ober war-dro ar vugale, an ti hag al loened, en tiegezhiennoù war ar maez. Labour a-walc'h a veze, rak kalzik a vugale a veze e pep ti. Cheñchet eo an traoù abaoe ar bloavezhioù hanter-kant, ha kalz merc'hed hiziv a labour en diavaez, koulz war ar maez hag e kêr. Penaos neuze kempouezañ ar vuhez evit ma c'hellfe ar vugale kaout amzer gant o zud, hag o zud kaout amzer da vevañ hep re a drubuilhoù hag hep bezañ war brez atav ? « Me 'm eus ket c'hoant bezañ 'giz va mamm ! Hi, ne gave ket a amzer evidomp. Pa soñjan mat, 'm eus kavet dipitus ne vefe ket bet deuet ganin, ur wech zoken, d'ar sinema pe d'ar poull-neuial d'ar merc'her goude lein, goude dezhi bezañ er gêr d'ar mare-se ! » Evel-se e lavare din ur vaouez a bemp bloaz ha tregont, dezhi daou vugel. Deuet eo a-benn da renkañ he amzer labour evit bezañ er gêr gant he bugale, bihan c'hoazh anezho, pa vez ar re-mañ er gêr ivez. « Ne welan ket an traoù evel va mamm. Hi a lakae he labour da gentañ. Me, ne ran ket. Gouzout a ran pegement e plij d'am bugale pa gemeran amzer da c'hoari ganto. »

Ar pezh a gleven c'hoazh en troc'h-kaoz am boa ganti a oa an dra-mañ : « Va buhez a labour n'eo ket asur tamm ebet, gant an nec'h a zeu rak an dilabour. C'hoant am eus e rafe va bugale gwelloc'h egedon hag abalamour da se e fell din, ha da va gwaz ivez, reiñ muioc'h eus va amzer dezho. » Ar pezh ne grede ket lavaret eo o doa c'hoant, hi hag he gwaz, bezañ kerent parfet, evit ma vefe o bugale e-touez ar re wellañ. Tregont vloaz zo e roe ar merc'hed ar plas kentañ d'al labour alies. N'eo ket ken gwir ken hiziv, hag ar wazed o-unan a gomañs cheñch war ar poent-se. Diaezamantoù al labour a c'hell bezañ kaoz, met ivez marteze ur c'hoant nevez da vevañ gwelloc'h ar vuhez a familh.

Job an Irien, Kazetenn Ya ! – Niv. 314, 10/06/2011

1. Compréhension de l'écrit (10 points)

Respontit e brezhoneg d'ar goulennoù amañ war-lerc'h :

- Penaos e veze renket buhez an tiegezh ha labour ar feurm gwechall, war ar maez, etre ur gwaz hag e wreg ? (Diell 1)
- « Ne welan ket an traoù evel ma mamm. » Displegit ar frazenn-mañ. (Diell 2)
- Penaos e c'hell an testennoù-mañ bezañ liammet ouzh an danvez-studi « An tachennoù prevez hag an tachennoù publik » ?

⁴ Marc'h-limon : ar marc'h a vez staget ar c'harr pe an arar outañ.

⁵ Mizoù : un dispign, un dra bennak da brenañ.

2. Expression écrite (10 points)

Respontit e brezhoneg da unan eus an daou c'houlenn amañ war-lerc'h.

Savit ur pennad-skrud a 120 ger d'an nebeutañ.

Goulenn A

Evit lidañ devezh ar merc'hed en ho lise emac'h o prientiñ un diskouezadeg diwar-benn cheñchamantoù buhez pemdeziek ar merc'hed abaoe ar bloavezhioù hanter-kant. Karget oc'h da skrivañ an destenn a ginnig an diskouezadeg.

Goulenn B

Al labour, ar familh, an diduamantoù... Petra eo ar pouezusañ ? Roit ho soñj.